

WAR AR MENEZ AR BASTORED

H. Du Rusquec

L. Vidal

Ton : Vierge, fontaine...



1. War ar me - nez ar bas - to - red A - greiz di - wall o deñ - ve - di - gou,
2. A - berz Dou - e eur bur - zud braz War an dou - ar a zo c'hoar - ve - zet;
3. Hag ar bas - to - red e - tre - zo, An eil d'e - gi - le a la - va - re:
4. En eur c'hraou di - gor d'an am - zer Ha war eun tam - mig plouz as - ten - net
5. E - vel ar bas - to - red sen - tuz Ouz an ê - lez o - doa bet kle - vet,



1. Ker - kent en noz sklê - ri - jen - net O - deus kle - vet e barr an neñ - vou:
2. Hag an ê - lez a res - pon - tas: "Eur Zal - ver e - vi - doc'h 'zo gan - (n)et."
3. Ker - zom, bre - maig ni a we - lo Or Zal - ver, or mestr hag or Rou - e.
4. E - no e wel - jont ar Zal - ver, Ar bu - ge - lig ne - vez - mail - lu - ret.
5. Ni hoc'h a - dor, Ma - big Je - zuz, E - pad an noz - vez - mañ ben - ni - get.



1. War ar menez ar bastored
A-greiz diwall o deñvedigou,
Kerkent en noz sklêrijennet
O-deus klevet e barr an neñvou :

Diskan : **Nouel ! Nouel ! Nouel da Jezuz ! (2 w)**

2. A-berz Doue eur burzud braz
War an douar a zo c'hoarvezet;
Hag an êlez a respontas:
"Eur Zalver evidoc'h 'zo ganet."
3. Hag ar bastored etrezo,
An eil d'egile a lavare:
Kerzom, bremaig ni a welo
Or Zalver, or mestr hag or Roue.
4. En eur c'hraou digor d'an amzer
Ha war eun tammig plouz astennet
Eno e weljont ar Zalver,
Ar bugelig nevez-mailluret.
5. Evel ar bastored sentuz
Ouz an êlez o-doa bet klevet,
Ni hoc'h ador, Mabig Jezuz,
Epad an nozvez-mañ benniget.

SUR LA MONTAGNE LES PÂTRES

1. Sur la montagne, les pâtres,
Tandis qu'ils gardaient leurs moutons,
En la nuit illuminée
Ont entendu du haut des cieux:

R: Noël ! Noël ! Noël à Jésus ! (bis)
2. De la part de Dieu, une grande merveille
Sur la terre est advenue;
Et les anges répondirent:
"Un Sauveur vous est né."
3. Et les pâtres entre eux,
L'un à l'autre disaient:
Allons, tout à l'heure, nous verrons
Notre Sauveur, notre Maître, notre Roi.
4. En une crèche ouverte à tout temps,
Sur un peu de paille allongé,
C'est là qu'ils voient le Sauveur,
Le petit enfant nouvellement mailloté.
5. Comme les pâtres, obéissant
À la voix des anges qu'ils avaient entendue,
Nous vous adorons,
Enfant Jésus, en cette nuit bénie.